

28. Pet gwech n'hon eus ket klevet gant hini pe hini,
Dalc'het klanv gant poan spered pe gant droug izili,
Tud kaset gant o c'hlenved betek dor ar maro
Hag a zo bet pareet o pedi sant Telo.
29. Doue dre nerz ar Sant-man, da galz a ro sikour,
Pa vezent sur e danjer war zouar pe war zour.
Betek en dachenn-emgann, e kreiz tan ar brezel
Sant Telo a oar difenn e vignoned fidel.
30. Rak-se c'hwi tudou yaouank, bleuenn dispar hor bro,
Evit chom gwir gristenien, holl pedit sant Telo,
Grit holl tro ar relegou arak mont d'an arme,
Hag e vezoc'h diwallet en amzer ho konje.
31. Merc'hed yaouank Landeleau, holl verc'hed ar c'hanton,
Deuit ivez da bedi sant Telo hor patron,
Hag e chomoc'h direbech epad ho yaouankiz,
Fidel war hent an dever, ha fidel d'an Iliz.
32. Pôted, merc'hed ar skoliou, evit beza furoc'h
Deuit da skol sant Telo, n'eus ket eun all gwelloc'h.
Digorit ho taoulagad ha sellit gant evez,
Ouz ar gwer livet ken brao en hoc'h iliz parrez.
33. Tadou ha mammou kristen, pedit, pedit bemde.
Hor patron mat sant Telo evit ho pugale.
Rak ene ho pugale a vez e gwall danjer
Dal ma vezont en henchou ha pellik diouz ar ger.
34. Hon tud koz a oa devot da bedi sant Telo
Ni breman, o bugale, a rank ober 'veldo
Baleomp hed a roudou o deus grêt hon tud koz
'Vit ma vevimp da viken ganto er baradoz.

DISKAN DIWEZA :


Dirag ho relegou
E touomp, sant Telo.
Kerzout war ho roudou
Holl betek ar maro.

Imprimatur :

Quimper, le 15 Avril 1944.

A. MOENNER, Vic. gén.

Kantik Sant Telo




TON : D'hor mamm, santez Anna...

DISKAN :

Sant Telo, pastor mat
Pedit 'vidomp Doue,
Bezit gwir alvokad
Evit ho pugale.

TON : Santez Mari, mamm Doue.

- Gwechall a-hed ar vro-man, n'oa nemet paianed
Arôk ma teuas enni tadou ar Vretoned,
Tud kalonek ha dispont, tud a relijion,
Gwir pugale sent brudet, evel hor sant patron.
- E bro-goz ar Vretoned eo bet ganet Telo,
En eur familh pinvidik, ha karet mat er vro.
Ano e dad oa Enzig, ano e vamm Gwenhaff
Daou zen eus ar re wella, o chom wardro Landaff.
- Tud hor sant o doa madou ha kalz vertuz ivez,
— Daou dra diaes da gavout dastumet asamblez ! —
En o c'halon ne vagent nemet doujans Doue,
Setu perak e rejont sent eus o bugale.
- Sant Telo a voe kaset gant e dad hag e vamm
Da skolañ eun den santel p'edo c'hoaz yaouank flamm.
Dubrig, an eskob brudet, ar mestr leun a furnez,
A daolas en e galon hadenn ar santelez.
- Founnus evel an avel, an aotrou sant Telo,
A gerze hed ar maeziou pignet war eur c'haro,
Evit kinnig pep sikour d'an dud-klanv, d'ar beorien
Ha ranna kenetrezo e dammik aluzen.
- Mar doa tener e galon e kenver e nesa
Evit e gorf e-unan n'oa ket ar memez tra ;
Ouspenn ma yun alies, 'vit gwele da gousket
N'en devoa hor sant patron nemet eur maen kalet.
- An drouk-spered kounnaret o welout e furnez,
A glask beuzi sant Telo e fank an hudurnez ;
Merc'hed, eus ar re falla, a boulzas d'e denti;
Met ker e koustas dezho, eun deiz, o falloni.



8. Doue, difennour Telo, en devoa permetet
Ma ve ar merc'hed fall-man, raktal diskiant,
Hep dezho beza gallet mont betek sant Telo,
Daoust m'edo an drouk-spered a-unan krenn ganto.
9. Tud ar vro dal ma klevjont kelou a gement-man
A zougas da sant Telo eun doujans vras kenan,
Ar baianed o-unan a zeu diwar neuze
Da c'houlenn ar vadiziant, en o fenn eur roue.
10. Wardro ar bloavez pemp kant, hervez ma red ar vrud,
Sant Telo a lavaras hep kenavo d'e dud,
Evit heulia sant David, sant Patern, spered-lemm
Betek skol vras Paulinus ha kêr Jerusalem.
11. Arc'heskob Jerúsalem, hervez m'eo bet skrivet,
A reas eur gwir eskob eus hor patron karet.
Ha dem-c'houde sant Telo a ziskennas e Breiz
Evit sikour hon tadou da zerc'hel mat d'o feiz.
12. En istor 'lennomp, ivez, penaos en amzer-se,
Sant Telo en doa kerent du-hont e bro-Gerne:
Eur c'hoar dezhan dimezet gant eun den pinvidik,
Bet ganet e Breiz-Izel, hanvet e oa Budik.
13. 'Vit rei da dud e familh eur merk a garantez
Mont a reas d'o gwelout gant eur gwir levez.
Met ne chomas ket gwall bell gant e vreur hag e c'hoar,
Ken distak oa e galon diouz holl draou an douar.
14. E vuhez en doa gouestlet da servicha doue,
Ha ne glaskas er bed-man, nag enor, na leve,
Morse n'en deus bet sonjet en aour, nag en arc'hant,
Kas pep kristen d'an nenvou oa bolontez hor sant.
15. Epad seiz vloaz ha seiz miz a-unan gant Samson
E prezegas er vro-man ar gwir relijion;
Warlerc'h ez eo bet eskob, e Landaff, en e vro
Met ne vevas ket eno tre betek ar maro.
16. Ar vro-man a voe gwastet gant eun derzienn, siouas!
Hag a laze 'vel kelien an dud bihan ha bras.
Al loened o-unan ganti 'veze faget
Hag evit o farea n'oa gwir louzou ebet.
17. Ar pastor mat sant Telo n'espernas ket e boan
Evit dousat o foaniou d'an holl, bras ha bihan.
A galon vat e roas ar pezig en devoa
Evit sikour e zened ha klask o farea.

18. Noz ha deiz digant Doue goulenn a ra pardon
En ano e vugale ken gwasket o c'halon.
Ar sant a voe selaouet p'edo c'hoaz o pedi,
Eun ael eus ar baradoz a zeus en e di.
19. Kannad an aotrou Doue 'laras da sant Telo
Kas gantan e gristenien ha mont kuit eus ar vro.
Senti a reas kerent ouz gourc'hemenn an ael,
Hag e teuas adarre en dro da Vreiz-Izel.
20. Neuze, hervez ar gredenn, e kare sant Telo
Ober an dro ken santel a reomp ni c'hoaz hirio,
Evit laret da Zoue bennoz ha trugarez
Da veza bet diwallet e dud en dienez.
21. Pa voe fin d'ar c'hlenvejou, du-hont e bro Geumri
Sant Telo a zistroas, eun deiz, d'e eskopti.
E ker Marden eo marvet, evel ma varv ar sent
Wardro ar bloavez pemp kant unnek ha triugent.
22. Kerent warlerc'h e varo, e sav eun tamm tabut
Diwarbenn korf sant Telo, etre tri rummad tud:
Re Landaff ha Pennalun ha Landeliou-Vavi
Eo an tri rumm a glaske e gorf da anteri.
23. Tud Landaff a c'hounezas war an holl ar viktor.
El lec'h-man e voe beziet hor patron, hor pastor.
War e vez e c'hoarvezas niver a vuzudou
Arôk m'eo bet degaset deomp-ni e relegou.
24. Setu aman, kristenien, eui loden, eur pennad
Eus a vuhez sant Telo, hor skoazell hag hon tad,
An den santel a stourmas, gwechall, e Breiz-Izel
Da virout er c'halonou hadenn an Avel.
25. Tud vat parrez Landelo, na c'hwil 'zo evurus,
Dre ma talc'hit eul lodenn eus e gorf presius.
Dougit bepret gant doujans relegou sant Telo
Ha chomit war e roudou, holl, betek ar maro.
26. Meur a hini marteze a gavo gwall galet,
Beza kristen direbech a-wel d'an holl, bepred.
Morse na gallit fizians, hag e kreiz ar stourmad
Sonjit hoc'h eus en nenvou eur sant 'vit alvokad.
27. Pa vimp eta bourevet gant ar boan, an anken,
Kasomp betek sant Telo hep dale hor pedenn
Hag e vezimp divec'hiet gant skoazell hor patron:
Testeni a gement-man hon eus en hor c'hanton.